

TROC'HAÑ UN DEN E DAOU DAMM...

Ur studier gwall yaouank e oan d'ar 17 a viz gwengolo 1981. En deiz-se e oa bet Robert Badinter o tifenn e lezenn hag a ranke freuziñ ar gondaonidigezh d'ar marv. Kondaoniñ unan d'ar marv a oa kondaoniñ anezhañ da vezañ troc'het e daou damm : e lakaat da bignat war ar chafod, en em astenn warnañ ha gortoz diskenn al laonenn yen ha marvel, ha se en ur porzh karc'har teñval. Merket don on bet gant e brezeg am boa selaouet penn da benn d'ar c'houlz-se. Sede pan eo aet d'an Anaon n'eus ket keit-se e kinnigan amañ tammoù heverkañ e brezegenn dirak ar gannaded, da vihanañ ar reoù a gavan pouezus :

« Anv zo, a-benn ar fin, er freuzidigezh, eus un dibab diazez, eus meizadur mabden hag eus meizadur ar reizh. Ar reoù a fell dezhe kaout ur reizh o lazhañ, ar re-seoù zo kaset en-dro gant un div gredenn : ez eus eus tud kablus penn-da-benn, da lavaret eo tud kiriek penn-da-benn d'o aktoù, hag e c'hall bezañ ur reizh sur eus e difaziusted betek divizout e vevo hemañ hag e tleo hennezh mervel.

(...)

An dibab kinniget d'ho koustiañs zo sklaer eta : pe e nac'h hon c'hevredigezh ur reizh hag a lazh hag e asant hon c'hevredigezh sammañ kement-mañ, en anv an talvoudegezhioù diazez – ar reoù o deus graet anezhi unan veur ha doujet etre an holl – buhez ar reoù hon hiris, diskianted pe torfedourien pe an daou war ar memes tro, hag eo dibab ar freuzidigezh ; pe e kred d'ar gevredigezh-mañ, en desped da skiant-prenet ar c'hantvedoù, lakaat diverkañ an torfed gant an torfedour, ha neuze eo ar raskadur.

(...)

Ar reizh a raskadur-se, ar reizh a anken hag a varv-se, divizet gant e lec'hed degouezh, zo nac'het ganimp. E nac'hañ a reomp abalamour m'eo evidomp an enep-reizh, dre m'eo an angerzh hag an doan trec'h d'ar poell ha d'an denelezh. »

* * *

Un toullad bloavezhioù zo em boa savet un tamm skrid diwar-benn unan o vont war ar chafod. Gant ma gerioù em boa klasket lakaat anezhañ da gontañ petra a c'hallfe momed diwezhañ unan a oa da vezañ troc'het e daou damm :

"Anton K. divunit ! Deuit en-dro !"

Sed ar gerioù kentañ a glevas pa deuas en-dro, goustadik.

"Deut eo e-barzh en-dro", eme ur vouezh all, a glevas spisoc'h.

Ha neuze e welas trumm un engroezad tud bodet, izeloc'h, dirakañ, tavedek, o selloù paret warnañ. Ne zeue ket a-benn da welet piv 'oa aze, evel pa vije an holl daoulagadoù-se d'un dremm nemetken.

Kavout a rae dezhañ e oa seizet e gorf. Klask a reas fiñval, met ne deuas ket a-benn. An dud a selle outañ hag eñ a ranke sellet oute. Kompren a reas, neuze, e oa stardet e zivvrec'h a-drek e gein ha ken stardet all e zivesker etreze o div. Er stad-se ne c'heller ket sevel e benn gwall uhel. Kaer en devoa hen ober ne fiñve tamm. War un dro e teuas c'hoant dezhañ da zistagañ ur poz bennak da sachañ evezh an dud a oa war e dro. Ne zeuas tamm poz e-maez e c'henoù... Ha ne wele ket anezhe kennebeut.

Grozmoladeg a groge da sevel e-touez an dud. Paouez a reas gant e zifretañ, kement a c'hoant en devoa da gompren petra a c'hoarveze. Moarvat e oa dispourbellet e zaoulagad evit bremañ, se eo a gomprenas diouzh ar souezh a wele e selloù ar bobl bodet dirakañ.

Sellet a reas war draou hag e welas diouzhtu al leurenn-goad ma oa bet staliet warni, a-us d'ar bobl. War ar memes tro e teuas, diouzh e gostez kleiz, un den duwisket, ur c'holier gwenn ouzh e soutanenn, ul levr en e zorn kleiz. Hemañ a-raok bezañ tost da Anton K. a grogas gant e zorn dehou da ober ur pezh sin ar groaz en ur vousediñ, teñval e benn.

Anton K. en devoa komprenet e pelec'h e oa hag a-raok dezhañ gallout lâret un dra bennak evit klemm pe goulenn sikour, e klevas e vouezh-eñ o respont d'ar beleg : "Nann, n'em eus tamm keuz eus netra. Ya, asantiñ a ran goulenn degemer Doue evit ma ene."

Un den all, ken duwisket all, o tont eus an tu dehou dezhañ en taol-mañ, gant un tog biñset mat war e benn, a zenesaas ivez ha diskenn un dornell, hep rannañ grik.

Anton K. a glevas c'hwitelladenn al laonenn lemm o fuc'hañ hag o tiskenn war e c'hoûg. Ar c'hwezhadenn a yenaas e c'hoûg. Gant ar "c'hlek" a voe neuze e kouezhas ul lien du war e zaoulagad. Dibenn

Herve Bihan

Levrlennadur berr ha lec'hiennoù

Herve Bihan, Traoù kouer, Al Liamm, 2010, pp. 82-83.

Robert Badinter, L'exécution, Éditions Grasset et Fasquelle, 1973.

Robert Badinter, testenn glok e brezegenn (17.09.1981) :

<https://www.peinedemort.org/document/4738/Debats-a-l-Assemblee-nationale-sur-l-abolition-de-la-peine-de-mort-en-France-intervention-de-M-Badinter-garde-des-sceaux-ministre-de-la-justice>



<https://www.gouvernement.fr/actualite/le-9-octobre-1981-la-peine-de-mort-est-abolie-en-france>